

ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL.

Savet gant ar Roue Gralon,
GOUDE MA VOA BEUZET KÆR-IS.

'Neb a bed Gærc'hes Remengol
Biviken ñe dai da goll....

En Escopti Kërne, el lec'h emma brema môr Douarnenez, e voa guechal eur gaer vras meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan ac huel, gant selujou houarn he difenne deus ar môr. Er gaer-ze ne velet, e touez an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl a fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze, eu Is a voa Roue Breiz-Izel. Bet e voa brezeller en e yaouanquis, a rust en andret e zujidi; mæs en e gosni, sclerijennet dre ar feiz christen, e teuas da veza douc, evel eun oan. Hirvoudi a re, alies var dizurzou Is, a var ar vuez dirollet a rene e vere'h, ar brincès Ahès, gant an noblanç yaouanq a gaer, a deus ar vro hanvet, hirio, Kær-Ahès, pehini a voa dezi a leve.

En amzer-ze, e voa e Breiz-Izel, daou abostol zantel, daou vignon da Zoue, sant Caourintin, kenta Escop a Guemper, a sant Guenole (1), kenta abad a Landevennec; alies ho devoa prezeguet ar feiz er gaer a Is, a gourdrouzet ar Roue Gralon, abalamour d'an droug-oberou, d'an torfejou a d'an injustiçou a ret, bemdez, e pales e vere'h yaouanq : mæs goab a ret'anezo, ac ar Roue, sempleet dre an oad, nen devoa mui a c'halloud avoalc'h evit arreti dizurzou kær bras.

Doue a skuizas, er fin, o velet Is caledet en he fec'hejou, ac a roas da anaout da Æl Breiz-Izel, e vignon, Guenole, penos, eb dale pell, ar gaer gaer-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent, Guenole a bignas var e varc'h, ac a redas da gaer Is, o sonjal c'hoas dizarmi koler Doue. Mæs tremenet e voa an amzer a druetz. P'a en em gavas an abad santel, var dro anter-noz, selujou Is a voa digor, ac ar môr a c'hroze spountus, o tiruillal var an dud, an tier ac ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon ep ken; guelet a rer c'hoas roudou treid e varc'h er garrek, var behini, abaoue, abadet Landevennec, araug komer ho c'harg, a deu da ober o feden a da anaout ar Roue Gralon evit fondatour ho c'houent.

Kær-Is ne m'a mui, evel Sodôm, Gômior a Babylon; ac hirio ar môr a ruill dreist he fen.

Da zao-heol, Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var lein Mene-Hôm, a dolas, ac'hano, eur zell truezus var e lere'h : Mæs el lec'h ma edo ar gaer gaer a Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, ac e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue ac ar Vere'hes da veza saveteet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, e velas dindan an heol, o luguerni, *Ru-mengoulou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, var pehini e vije sacrificet, tud veo, a beb

(1) *Guen-oll-e*, *Oll-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant e van, ar santes Ven, abalamour ma voa eur buguel coant a fur. Sant Guenole, dre e vertuziou, en deus meritet an hano caer a Æl Breiz-Izel. (L'Ange de la Bretagne.)

mis, eur buguel bian, c'hoas eus ar vrôn. Neuze, beuzet en e zaëlou, ac e zaoulagad savet e trezeck an En, e lavaras d'e vignon santel :

« Var ar Men ru zont, consacret d'a eun Doue barbar, me a rañ sevel » eun Ilis caër d'ar-Verc'hès, ac el leac'h ma skuiller ar goat da Teutatès. » e skuillo Mam ar guir Doue he graçou var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromessa, a beleven ar Bayonet, o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zrehaç e' kever Argol, e pen ar Vretonnet convertisset.

Goude beza gret e' beden, var Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heuilhas Guenole da Abaty Landevennec, savet gantan, eun neubeut blavezion ken-toc'h. Diarac kement-ze, en devoa, c'hoas roët e balès, e Kemper, da sant Caourintin, pehini en devoa, torret e naon dezan, a de compagnunes, gant eun tam deus e besk bian. E plaç ar palès-ze, ema brema Ilis caër cathedral Kemper:

Gralon a dremenas e Landevennec, ar rest eus e vuez, en eur biuzen galet, ac alies e ze gant e vignon ker da Remengol, da bedi evit e bobl, an *Itron Varia Remed-Oll*. Beza en devoa an eur d'he guelel brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, ac o vervel etrø divrec'h sant Guenole, e Landevennec, e recommande e ene da Zoue en eur lavaret gant fiçians :

- « Itron Varia Remengol,
- » Mirit ouzin na zin da goll. »
- « Pedit ive, ho mab Jesus,
- » Ma vezin gantan evurus. »


C'houezec kant vloas a zo, abaoe, ma e maro Gralon, ac ar Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz ac a galon, ho deus c'hoas sonj eus ho Roue coz, ac eus e vignon, sant Guenole. Mæs ma c'hanefent guelloc'h histor ho bro gaër, pa zeont da zul an Drindet, da bardon bras Remengol, a pa velont môr Douarnenez, Menez-Hôm, Landevennec, a tour huël Ilis miraculus an *Itron Varia Remed-Oll*, e lavarfont, an daëlou, en ho daoulagat, en eur vale gant respet, var douar ar Sant ac ar Rouane :

- « Bras ar burzudou a zo bet,
- » Ebars en amzer dremenet :.... »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirio, an Itron Varia Remengol, en andret an oll Vretonnet, ac ispicial, en andret ar belerinet a deu bemde, d'he guelel, alies eus a bell bro, a calç anezo, diarc'hen, ac e corf ho rochedou.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noas, soudardet Breiz-Izel, e creis tân ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras e furol, an oll dud affliget, a gorff, a galon ac a speret, darn en o foaniou, darn en dangerriou, darn all en dizesper, ac ôll var gouele ar maro, ho deus sonj eus ho mam douç a mad, ac alies e leveront dezi, gant carante a gant fiçians en he galloud, ac en he madelez.

- « Guerc'hès sacr' a Remengol, patronez Breiz-Izel,
- » Pedit evidomp, hirio, a pa rankimp mervel;
- » Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet,
- » Ho deus ho caret, ho car ac ho caro bepret. »



KANTIK SPIRITUEL

EN HENOR

D'AN ITRON VARIA REMENGOL (*)

PATRONES BREIZ-IZEL,

Kurunet dre urz hac en hano hon tad santel ar PAB PII NAO, an
30 a vis mae 1858, gant an aoutrou RENAN-NICOLAS SERGENT,
Escop Kemper ha Leon (2).

Itron Varia Remed-oll,
Miret ouzimp ne c'haïmp ña goll.

Guerc'hès sacr' a Remengol, Patrones Breiz-Izel,
Pedit evidomp, hirio, a pa rankimp mervel !

Var an ton : *Glac'har ar Verc'hes.*

Tad, Mab, ha Speret-Santel, tri ferson an drindet,
Me ho ped, a vir galon, da roiñ din ar speret
Da *composi* ar c'hañtic d'ar stereden vrillant
Ar fourdelisen gaëra demeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, Tad Eternel, ar Verc'hes binniguet
Pried ar Speret-Santel, Rouanez an Alet,
Dreist an oll groaguez devot hi so bet cavet din,
Da veza mam da Jesus, hon Redemptor divin.

Pa zeuan da niveri, Guerc'hes sacr ha santel,
An eñor, ar meulodi hoc'h eus e Breiz-Izel,

(1) Remengol, hanvet gouechal, *Ru-men-goulou*, da lavaret e, *Men-Ru-ar-goulou*, abalamour ma voa, eno, eur men ru, pe eun templ, consacret da c'houlou De, enoret evel eun Doue, dindan an hano a eutates (Doue-Tad) ar Roue Galon, goude beza discaret an templ-ze a zavet, en e blaç, eun ilis caër da vam ar guir Doue, a chanchas hano payen *Ru-men-goulou*, en hano christen a *Remengol*, da lavaret e, *Remed-oll*, deus a behini ar Batrones a zo hanvet *an Itron Varia Remed-oll* (*Notre-Dame de Tout-Remède*) abalamour dar burzudou bras a ra bemdez, eno, ar Verc'hes, abaoue amzer ar Roue Galon, betec hirio.

Remengol a zo bet, a viscoas, ar gaëra ac ar santela Ilis a Vreiz-Izel; hervès an dud coz, peb guir Vreton, a gle, eur veach, da viana, *beo pe varo*, ober pelerinach Remengol.

(2) Kurunen an Itron Varia Remengol, ar gaëra zo bet gullet biskoas e Breiz-Izel, a zo en aour hac e perlès.

Va speret a so dister evit ho tiscleria,
Neme doc'h-hu a zeufe, hirio, d'am azista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em eus antreprenet,
Publia ho calloud vras etouez ar Vretonet.
Ha discleria ar graçou accordet d'ar bed oll,
Dre c'hraç Jesus hon Autrou, en ilis Remengol.

E pep lec'h m'eo enoret Mari, hor mam santel,
Alies ve silaouet nep so dezi fidel,
Mes beza en deus eur plaç, bars en pini bemdes,
E scuill var ar Vretonet tensor he madeles.

Er plaç-ze, e Breiz-Izel, meurbet darempredet,
En escopti a Guérne, er bares a Hanvec.
Eus eun ilis consacret da c'hloar a da enor,
Rouanez an oll Alet, guir vam hon Redemptor.

Guir dud devot d'ar Verc'hes, m'ho ped, diredit oll,
Deut gant laouenidiguez da ilis Remengol,
Evit pidi mam Doue da roi deoc'h ar yec'het,
Ha da zivoal hoc'h ene dious laç an drouc-speret.

M'ar d'é poaniet oc'h ene gant gouliou ar pec'het,
Deut d'ar sourcen a vuez, hac o pezo remed,
Goulennet oc'h mam Jesus graçou celestiel,
Ma c'hellot chench a vuez, beza dezi fidel.

Mar dê ho corf forbuet gant an infirmite
Deut da ilis Remengol gant eur guir garante,
Ur plaç leun a viraclou dre c'hraç ar Verc'hes sacr,
Pini en oc'h oll boaniou, ho soulajo, timat.

A bêvar c'horn Breiz-Izel, e teu pelerinet,
Da bidi Mam hor Salver gant ur galon barfet,
Eus a escopti Leon, Treguer, Guened, Kerne,
E teu an oll dud devot da veuli Mam Doue.

Dre'r brut eus ar miraclou a ra e Remengol,
Dre graç Jesus hon Autrou, he deus ur galloud oll,
Mar teu ar belerinet bemdes e pad ar bloas,
D'ober an dro d'he ilis var ben ho daoulin noas.

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes sacr,
Ebars ilis Remengol dre c'hraç Jesus he Map,
Dre he sicour galloudus em eus antreprenet;
Discleria lot anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hes a Remengol, er bares a Hanvec,
E devez grêt a nevez ur miracl caër meurbet,
An oll a so estonet oc'h e consideri,
N'en deus netra impossibl, dec'hu, Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en eun oat dister,
Pa voa ar velin o vala, a guezas, er rivier,
Gant an dour e voa ruillet, ma c'has e toul ar'bal,
Ma songer e voa flastret, allas, gant an dour mal!

E dud gant cals nec'hamant ha melconiet oll,
Er goestlas, a voues huel, d'a Verc'hes Remengol;
Mari leun a garantez, dre e dorn binniguet,
A ziouellas e vue, er meas e oue tennet.

Evit rei guir desteni deus ar miracl caër-ze,
Ar buguel da Remengol a voa casset neuze,
Laquet er procession, gantan, ur c'houlouen,
Evit publia galloud ar Verc'hes souveren.

A dost d'ar C'hastel nevez hervez ma eo prouvet,
He deus grêt guir Vam Doue eur miracl caër meurbet,
Dre an tan eun tieguez a c'he da berissa,
P'o deus pedet ar Verc'hes da zont d'ho azista.

An ozac'h guir servicher d'ar Verc'hes binniguet,
En em strinquas d'an daoulin de fidi gant respet,
Mari leun a garantez a zigaças glao bras,
Ac ep ober droug da zen, an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoas sebezet, Guerc'hes mam a drue,
O compren ho carantez evit ho pugale,
En disquezet oc'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa,
Oc'h ober en e andret, eur miracl ar c'haëra.

Dre eun tourmant ar brassa, eur c'hoz ty o coteza,
Ur c'hrouadur o tremen en em gav dindanna.
Ar vein vras en dro dezan, ma songer voa lazet,
C'hui hepquen en zicouras, Rouanez an Alet.

E dud a lavare dec'h Guerc'hes a remed oll,
Sicouret hor c'hrouadur, pe e c'haïo da goll,
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Verc'hes,
Ar buguelic a c'hoarze dindan, leun a vuez.

Mari hor mam souveren var vôr a var zouar,

A den e servicheric d'...

Nombr bras a vartolodet he deveus preservet,
Prestic da goll o buez, p'ho deus hi he fedet.

Nombr bras a vatimanchou he deveus preservet,
Hac on dud hac ar madou dre he graç binniguët,
Ha bagou ha goberi e creis an tourmant bras,
Pa bedent hor Mam Mari a obtene ho graç.

C'hoas eur c'hrouadur yaouanq a escopti Leon,
A voa couezet er rivier, Doue, pebez eston!
Clasquet gant cals a glac'har, a pa ho deus pedet
Ar Verc'hes a Remengol, en instant eo cavet.

Pa gavchont ho c'hrouadur, hac en prest da vervel,
Ec'h implorjont, a nevez, Mari hon Mam santel,
Da rei dezan ar vuez dre he graç binniguët,
Dirac ar gompagnunez, ho leden zo clevet.

Eun den a c'houllet Leon, a gollas ar c'herzet,
So bet eiz mis o vale var bouez diou vas-loaec,
Grêt pris gant ar medecin evit troc'ha e c'har,
He zroc'ha e rez e c'hlin, Doue, pebeus glac'har

Eun nesvez en e vele e teuas chonch deza
E voa bet e Remengol gueichal o pardonna,
Ac e sant en e galon eur garantez ardant
Hac eur guir devotion d'ar Verc'hes oll buissant.

Guir vam Jesus hon Autrou, eme affiget,
Va sicouret em poaniou, Rouanez an Alet,
A me roi e donæson ar c'haëraso em zi
Da gass da zeiz ho pardon evit hoc'h enori.

Mari leon a garantez a bedas e mab quer
Da exauci ar beden a re e servicher :
Receo a ras ar c'herzet dre graç guir *Remed-oll*,
A bed eo oc'h e meuli en ilis Remengol.

Tregont den en eur vagic a barres Plougastel,
A gonfontas e rad Brest, gant ur barrat avel,
Oll e pedjont a galon patrones Remengol,
Eur batimant a deuas, savetët int bet oll.

Er gæc gaër a Vontroulez e grogas an tan goal,
Ar flamou tan tro var dre a veler e sal.

Evit gonnit ar victôr, soudardet Breiz-Izel,
A bed Mari, gant fizianç, e creis tan ar Brezel;
Ac ar victôr gounezet, ezeont a vandennou,
Da Remengol diarc'hen, e corf o rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet a diruillet,
Var ar môr braz e furol, prest da veza collet,
Eb eor, eb stur, eb sicour, oll e renkонт mervel,
Pa deu d'ho savetei, patrones Breis-Izel!

Ne ouffe quet niverri na dont da henvel oll,
Ar miraclou infinit a ra guir *Remed-oll*,
Evit nep zo guir gristen a leun a galon vad,
Hi zo guir advocades dirac Jesus e mab.

Ken a gorf ken a epe kement zo affliget,
Deut da ilis Remengol gant eur galon barfet,
Pedit eno, gant fianç hor mam santel Mari,
Ha renoncet d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant Thomas ha sant Bernard, tud guiziec ha santel,
A da Vari, mam Jesus, daou servicher fidel,
Hou assur, a bers Doue, biken, ne zai da gol,
An nep a gar ar Verc'hes, patrones Remengol!

Demp, eta, da enori, brema, da Remengol
Relegou sacr' ar Verc'hes, an daouzec Abostol
A Relegou sant Joseph a guir groaç hor Salver,
Maro, 'vit al liberte, var lein mene Calver.

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue,
Relegou sant Caourintin, kenta escop kerne,
A cale a Relegou all, gant ar Pab digasset,
E present da Remengol, evit ar Vrettonnet.

Couraich, couraich, Bretonnet, a gant fiçians deut oll
Da velet ho Patronez en ilis Remengol,
En em roet, a vrema, da zervicha Doue,
Ha da bidi ar Verc'hes ar rest eus ho pue.

Kement ez eo enoret ha caret gant Doue,
Ma permet ganti ober herves e bolonte;
An niver bras a c'hraçou a scuill demp var ar bet,
A douez oll...

E teu an oll dud devot gant guir devotion
D'a ilis caër Remengol da c'hounit ar pardon.

Eun Doue oll galloudec a bermet dre e c'hraç
Ma ze da Sul an Drindet ema ar pardon bras,
Ar bobl eus a Vreiz-Izel, a veler an deiz-se,
O tonet da Remengol da veuli mam Doue.

En deiz-se e c'honeser induljançou plehier
Ebars ilis Remengol e ty mam hor Salver,
En eur ober gant glac'har eur guir confession,
Hac o receo hon Salver dre ar gommunion.

D'an eizvet a vengolo, gouel he Nativite,
Ez eus ar memes pardon en ilis santel ze,
A da peb gouel ar Verc'hes a zo e pad ar bloa
E teu an oll dud devot de bisita gant joa.

Er solennite santel eus a Sul an drindet,
Kement a ya d'ar pardon a zo oll ravisset
E consideri Jesus ebars er Sacramant
O c'hortos hor c'halonou gant carantez ardant.

Deut oll eta, christenien, deut oll a vandennou
Da Remengol da bidi mam Jesus hon Autrou,
Assuret oc'h da veza gant Doue pardonnet,
Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hes binniguet.

Renoncet d'ho pec'hejou, hac en em arollet,
Ebars er breuriezou a zo instituet
Da enori ar Verc'hes, evel ar Rosera,
A rent d'hor mam souveren eun enor ar c'haera.

Ne vanquet quet da laret bemdez eur chapelet,
Lot demeus he c'hurunen, un dizenez hantet ;
Nep a zui d'he recita gant carantez barfet
A vezo guir servicher d'ar Verc'hes binniguet.

Tud leal a Vreiz-Izel, oll vignonet va bro,
C'hui, evit pere calir ar vue zo c'houero,
Joa deoc'h var an douar, ha graç digant Doue
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourcen a vue.

Pedit en ho c'hlenvejou, pedit en ho c'hlaç'har,
Ha pedit, en oll boaniou, hon deus var an douar
Brassa santes zo er bed, Guerc'hes sacr' Remengol,
M'ar bezit fidel dezi, ne deo biken da goll.

Guerc'hes glorius Vari, pedet, me ho suppli,
 Evit an oll dud devot a visitaï ho ty,
 Chasseet an drouc sperejou demeus hor c'halonou,
 Ha presantet da Zoue bemdez hor pedennou.

Guerc'hes sac'r' a Remengol, patronez Breiz-Izel!
 Pedit evidomp, hirio, ha pa rankimp mervel;
 Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet!
 Ho deus ho carèt, ho car, hac ho caro bepret.

Itron Varia Remengol, mam santel da Zoue,
 Pa vimp en heur hor maro, recevet hon ene,
 Ha dre ho torn binniguet cassit-hi da repos,
 Ha da veuli an Drindet e gloar ar Barados.

PEDEN AR ROUE GRALON,

D'an Itron Varia Remengol.

Itron Varia Remengol,
 Mirit ouzimp na zaïmp da goll;
 Pedit ive, ho mab Jesus,
 Ma vezimp gantan evurus.

000037

Itron Varia Remengol,
 C'hui eo Rouanez ar bed oll,
 Bezit hor mam, hor Batrones,
 A ni ho meulò da james.

P E N N

D'an Itron Varia Remengol,

**Evit beza preservet eus ar c'hlevejou, hac ispecial
 eus ar c'holera-morbus.**

*(Ar beden ma lavaret a galon e deus preservet eun niver bras a
 dud, ha saveleet calc a re all, skoel gant ar c'holera, e kar Mon-
 troulez, er bloavez 1854.)*

Itron Varia Remengol, patronès Breiz-Izel, mam an oll dud affliget, a
 speret, a gorf hac a galon, c'hui a souten courach ar soudardet, e creis

tân ar brezel, c'hui a asten ho torn a drue dar vartolodet, prest da gonfonti er môr bras e furof, c'hui a zisken, aliès, e c'hars guele ar c'hlanvour paour ho c'har, evit rei dean ar yoc'het, hac hanvet oc'h, e guirione, *Remed ar bed oll*. Pellait, eta, diouzin, Guerc'hes sacr, ar vocen gant an oll c'hlenvejou danjerus, va dioualit euz ar maro subit, hac evit renta testeni d'ho madelès, ezin, da Remengol, d'ho meuli ha d'ho trugarecaat, en hoc'h ilis santel. Eno, n'ho c'heus biscoàs, refuset nicun eus ho pугale; bezit trugarezus em andret. Gouscoude, ra vezo gret bolonte Doue, ha pâ zono va heur d'véza, Itron Varia Remengol, ho pet truez ouzin, grit din mervel, en ho carante, evel ar sant galloudus, pere a beder en ho ty santel.

Evel ze bezet grèt.

Itron Varia Remengol,
C'hui a zo remed ar bed oll,
Pellait diouzomp an teir goalen,
Brezel, kernès hac ar vocen !....

Ilis remengol a zo bet, abaone amzer ar Roue Gralon, hanvet Ilis *Rémed-oll*, an *Ilis miraculus*, abalamour d'ar miraclou bras a ra, eno, ar Verc'hes Vari.

Dre he galloud ar c'hlanvour paour a bare,
Ar mud a goms hac an den cam a vale !

Hanvet eo, ive, ar *sourcen a vue*, ar *feuteun a c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ro Doue, en ilis ze d'an oll gristenien.

N'ac-a bec'her eus Doue dispartiet,
E Remengol, a zo bet difaziet !!!...

Ilis sacr' an Itron Varia Remengol, a zo c'hoas hanvet, *Ilis ar Vretonet*, *Ilis ar sant hac ar Routanet*, abalamour, goude ma voa confontet Kærls, ar Roue Gralon a reas sevel Ilis Remengol, en enor d'ar Verc'hes, evit trugarecaat Doue da veza saveteet dezan he vue; mont a re, aliès d'he bizita, e compagnunès sant Caourantin, kenta eskop Kemper. s. Guenole, s. Guen-Æl, ha calç a sant all, pere a veve, neuze, e couent Landevennec, hac a brezegue ar feiz, dre ar vro.

Abaone, an amzer-ze, Ilis Remengol a zo bet darempredet gant ar bobl a Vreiz-Izel, carguet a c'hraçou hac a induljançou, ar re vrassa, roet gant hon tad santel ar Pap, hac an eskibien.

Er bloas ma, mil eis cant pemp hac antèr cant, on tad santel ar Pab, Pii nao, en deus roet da Ilis Remengol, eun tam eus a vir groas hor Salver Jesus-Christ, hac eun tam eus he gurunen spèrn; ar memeus Pab, en eus, c'hoas, laket digas, eus a Rôm, da Remengol, eun tam eus a vòal ar Verc'hes, hac eus ar bez en pehini e voa bet sebeliet, darn eus a relegou sant Joseph, sant Joac'him, sant Ian Badezour, sant Zac'hari santes Anna, santes Elisabeth, an daouzec abostol, ar pevar avieler, an doctoret bras eus an ilis, ha dre eur garante ar vrassa evit Remengol, en deus c'hoas, roet d'an tēmpl santel ze, corf sant Silven, mignon ha compagnon an abostol sant Paul, ha relegou *tri c'hant pemp ha tri ugent sant*, evit peb devez eus ar bloas.

Ar hescop Paris en deus roet, ive, da Ilis Remengol, darn eus a relegou sant Louis, roue Franç, santes Genovefa, patronès Paris, ha calç a re all.

Ar c'hardinalet, arc'heskop Tour, arc'heskop Bourdel, arc'heskop Lyon, arc'heskop Rouan, eskop Strasbourg, eskop Chartre, eskop Roason, eskop sant Brieç, eskop an Naonet, an aoutrou Joseph-Marie Graveran, eskop Kerne ha Leon, maro e Kemper, evel eur sant, eskibien all a Vreiz-izel, a Franç hac eus a vroïou all, ho deus roet da ilis Remengol, evel presanchou, ar c'haera, relegou eun niver bras a saent, peré ña bep pardon, a ve douguet e procession, gant ar helerinet.

Kement Sant a ouffe an den da bedi, en he boaniou, var an douar, a zo darn eus e relegou, en ilis miraculus ze, ken caret gant ar roue Gralon, gouelet a rer, eno, ouспен relegou ar Verc'hes, santes Anna, s. Joseph, an Ebestel, etc., relegou s. Augustin, s. Ambroas, s. Jerom, s. Ian Chrysostom, s. Bernard, s. Laurens, s. Sebastien, s. Roc, s. Dominic, s. Caourintin, s. Pôl a Leon, s. Guenole, s. Euzen, etc., relegou santes Barba, santes Mac'harit, santes Catel, santes Mari-Madalen, santes Philomen, hac eun niver bras a re all, *ouspen daouzec cant*, peré a zo, eno, evel eur hobl a saent, dirac an ltron Varia Remengol oc'he fedî da scuilla he graçon var ar helerinet a deu, eus ar pevar avel, da veuli, en ilis sacr' Remengol, Rouanes ar Sent hac an Aëtès, alvoadès an anaon, patrônès an dud paour, esperanç an oll gristenien, ha mam ger ar Vretonet.

Ha brema, va breudeur, demp oll,
 Demp da bardon bras Remengol,
 Demp da ilis ar Vretonet,
 Demp da sourcen an oll Remed !...

Bar pardon bras, pelini a bad pemp devez, an henchou a ve goloet a helerinet, darn bet elân gant elevejou daoujrus, darn all, distro divar ar môr, pe eus ar brezel, peré a c'ha diarc'hen, hac e coif ho rochedou goadec, all en em strinkont dan daoulin ractal ma velont tour an ilis santel alies, en em gay, ive, en ho zouès, eur c'hloarec yaouank benac, deut evit e gaenta goueac'h, hac en eur vouela, gant'laouennediguez, e lavar :

- » Salud, douar burzudus var bini bep kamad,
- » A laka daëlou a joa da zont em daoulagat,
- » Salut, ilis Remengol, ar gaëra zo er bed,
- » Salut, va fatrones vad, mam ger ar Vretonet !.... »

En he guever, ive, eur barz, eur pelerin coz, bet alies e pardonioù Remengol, ha deut c'hoas eur veac'h, var boues he vaz da c'houlen eur maro mad, a zistro, laouen d'ar gær, en eur gana meuleudi he batronez, chilaouet e bet he beden, hac an ltron Varia Remengol e deus assuret silvidiguez d'he ene, e barados Doue, ha repos d'he eskern, betec deis ar varn, e douar bipiguet bered he Barres. — Gouskoude pellâat a ra, gant anken.

Harpa a ra aliès, var e vaz ha teleur a ra c'hoas eur zel a drugare varzu ilis he Vam garantezus, na ne vel mui nemet bec an tour, e koue dan daoulin, hac e lavar, an daëlou, en he zaoulagat.

- « Kenavo'ta, Remengol, kenavo da viken,
- » Kenavo, Guerc'hes Vari, c'hui pini a garen,
- » Kenavo, pelerinet, kenavo, tud va bro,
- » Kenavo er Barados, kenavo, kenavo !!!... »

INDULJANÇOU REMENGOL.

Dre eur scrit apostolic, roet e Rôm, en ilis Sant Pêr, d'ar bemzec a vis even 1855, hon tad santel ar Pab Pii nao, en deus accordet, en e vadelès, eun induljanç plenier ha remission eus ho oll fec'hejou d'ar gristenien, pere, goude beza coveseet ha communit, a visito, gant devotion, ilis sacr' an Itron Varia Remengol; un induljanç a seiz vloas ha ken aliès a zaou-uguent devez d'an oll belerinet, ken aliès goueac'h ma visitint, gant devotion, ilis Remengol, ha ma pedint, eno, Doue hac an Itron Varia Remed-Oll.

An induljançou ma a all beza gounezet evit an anaon.

Dre eur scrit all, roet ive e Rôm, en ilis Sant Pêr, d'an dec a vis guener 1856, (scrit, pini a zo brema exposet en ilis Remengol, var un daullen aoùr, e c'hars treid ar Verc'hes) hon tad santel ar Pab en deus c'hoas roet da ilis an Itron Varia Remengol, an oll graçou, induljançou ha privilachou accordet gant ar Pabet da ilis an Itron-Varia-Loretta, en Itali. En ilis ze e conserver an ty e pini e chome ar Verc'hes Vari, e Nazareth hac e pini eo bet concevet hac en deus bevet hor Salver J.-C.

Er bloavès 1295, an Aëles a zougas, a dreus an oabl, an ty santel eus a Nazareth, d'an andret, hanvet, hirio Loretta, tost da Rôm, savet zo bet eno, eun ilis caër, pini zo bet abaoue darempredet bras-ha carguet a c'hraçou gant ar Pabet.

N'eus er bed universel nemet an ilis ze, ilis Loretta, hac ilis an Itron Varia Remengol, da bere e ve bet roet graçou ker bras, ker caër. Ar gristenien a visito brema hac en amzer da zont, ilis Remengol, ker brudet dre e miraclou, a c'hounezo ar memeus induljançou hac ar memeus graçou, evel a re a ia da Jerusalem, da Rôm pe da ilis Loretta, da visita bez hor zalver J.-C. heïou an ebstel ha ty ar Verc'hes Vari.

Dre eur scrit all, roet e Rôm en ilis sant Pêr, hon tad santel ar Pab en deus karguet Escop Kemper da guruni, *evit-han, hac e ne ano*, an Itron Varia Remengol.

Madou spirituel ken precius a zo eun testeni eus a zevotion hon tad santel ar Pab en andret an Itron Varia Remengol hac eur merk eus e garante evit ar Vretonet, pere a gavo bepret en ilis sacr' Remengol, remed en o foanio, var an douar, pardon d'ho fec'hejou, silvidiguez d'ho Enc ha delivranç d'an anaon.

MEDALEN AN ITRON VARIA REMED-OLL.

Medalen an Itron Varia Remed-oll, *biniguet hac indulgenciel* en ilis sacr' Remengol, dre urs hon Tad Santel ar Pab, a ro d'an den, fizianç e Doue, nerz a enep an drouc speret, chanç a boneur, var ar môr, er brezel, en trubuillou ar bed, consolation ha remed en oll boanioù hon deus var an douar. Peb c'hristen a gle, e pad e vue, douguen gant respect, en he guerc'hen, medalen precius an Itron Varia Remed-oll, hac en eur vervel, hen lakat var he galon evit mont dirac Doue.